

## ITRON VARIA AR JOA

e parrez Penc'hran.



- 
- 1 Ave, ave, o Maria!  
C'houi evidomp eo Mamm ar Joa :  
Rak-se ni 'bed ho madelez  
Da skuilh warnomp gwir levezez.
  - 2 Aman, Gwerc'hez, c'houi a zo bet.  
En amzer goz, brudet meurbet,  
Hag hon Tadou d'eoc'h a savas  
Eun iliz kaer, eun iliz vras.
  - 3 Bihanoc'h eo en deiz hirio,  
Met he gened n'eo ket maro :  
Kempennet koant eo adarre  
Dre aluzen ho pugale.
  - 4 Enni eur c'hloc'h a zeiz kant vloaz,  
En enor d'eoc'h, a dregern c'hoaz.  
N'eus ket uran, unan hepken,  
En eskopti ken koz hag hen.
  - 5 Aman, gwechall, d'ho pardonioù  
Pelerined a vilierou  
A zirede a bep kostez  
Evit meuli ho karantez.
  - 6 Hor c'halonou, Mamm benniget,  
En ho kenver n'int ket sklaset :  
'Vel hon tud koz ni ho karo  
Hag evidoc'h ni a vevo.
  - 7 Aman, Itron, nag omp laouen  
D'en em voda en ho kichen!  
Da gana d'eoc'h, bihan ha bras,  
Gant laboused ho torgenn c'hilas.

- 8 Arabad d'eoc'h ankounac'hat  
 Da drei warnomp ho taoulagad  
 Ha da ziskouez e pep mare  
 E karit c'hoaz ho pugale.
- 9 C'houi 'zo hanvet a-berz Doue,  
*Causa nostræ lætitiæ :*  
 Na lezit ket an trubuilhou  
 Da verzeria hor c'halonou.
- 10 Eus ho feuteun skuilhit grasou,  
 Koulz ha gwechall, war ar mammou,  
 Gras da vaga o bugale  
 Ha d'o sevel hervez Doue!
- 11 Ar blijadur a ro ar bed  
 A zo goullo ha trenk meurbet :  
 Ar pec'her paour n'hell kaout morse  
 Nemet joa faos en e ene.
- 12 Neket hounnez a c'hortozomp,  
 Neket hounnez a c'houlennomp  
 Goulenn a reomp al levenez  
 A zeu war-eeun eus ar furnez.
- 13 An neb a jom e gras Jezuz  
 A vev dinec'h hag evurus;  
 An neb a zoug eun ene glan  
 A drid zoken e-kreiz ar boan.
- 14 O Gwerc'hez sakr, mammenn ar Joa,  
 E stad ar c'hras grit d'eomp beva,  
 Hag, en despet da beb anken,  
 Ni a c'hoarzo hiviziken.
- 15 Ha p'en devo ar Maro mat  
 Peurglozet d'eomp hon daoulagad,  
 Ni a c'hoarzo, gant ho pennoz,  
 E-kreiz jaoiou ar baradoz!

BASTIEN

Imprimatur :  
*Kemper, 1 a viz C'hovevrer, 1934.*  
 † Auguste COGNEAU,  
 vikel vras.